

# YAN AR PAOTR MAD


(RIMADEL FARSUZ DA GOUNTA A VOUENZ UHEL, A-BEZ PE A DAMMOU)

(Yan a zo tomel d'ezan eun trmik-bian, hag a stag d'en em ventl)

Marziale



Di - go do, ma - don



do, Paot Yan zo eur paot mad di - go



do, ma - don do, Paot Yan zo eur paot mad.

491

Ia, me lavar deoc'h me eo mestr an dud  
Haga oar kas ar c'hillok hag ar yer d'ho glud.  
Han ? (Ardou a ra gant he zaoulfad  
hag he c'hinou).

'Leac'h mac'h em gav hema 'n den-ma  
Zeuz ken d'ober 'met 'n'em jacha :  
Rinset 'n ti ha rinset 'r blasen,  
Ha Paot-Yan mestr var an dachen !  
Han ? (Ardou).

Me meuz ket bet soun bistoaz  
Rag an aotrou na rag he jas,  
Na rag luc'het na rak kurun,  
Na rag moget eur c'horn bulun,  
Han ? (Ardou).

Ama 'z divreac'h, sellit, paotred !..  
Ha krabanou !.. ha divorzed !..  
Eur paot hag a zo ploum 'n he zav,  
Ha guest... da frigasa peb tra !  
Han ? (Ardou).  
Fii ! (Trouz an avel er c'herdign)

'T'aman eun den 'n'eo ket nec'het  
Evit eua diouz he zec'het !..  
Ha pa 'n deuz rinset 'r boutaillou...  
Start atao var he gillorou !  
Han ? (Ardou).  
Hep a la (en eur lamet)  
Hep a la  
Hepik a la !  
Han ? (Ardou adarre).



Ja, me lavar deoc'h me eo mestr an dud  
Haga oar kasar c'hil ok hag ar yer d'ho glud.  
Han !

Goulennit digant Kathellik :  
Neuz ket pell, oan tomet 'n tamik  
Hag e oan eat d'he zi diouz an noz  
Gant Fanchik va c'hamalad koz  
Da gemer eur banne melen  
Da zigraza va c'hornaillen.

Hop a la !.. Em gavet en ti..  
E oa eun trouz !.. eur jolori !  
Ar pec'hejou, ken a strake,  
An taoliou-dourn ken a zute :  
« Petra 'n diaoul, a lavaremp-ni,  
» Daoust hag ama 'ma 'l laer en ti ?.. »

Nan, tri aotrou o sinkanat,  
Anter-vezo, sklear hag anat !..

Ha me mout dioc'htu dezho :  
« Peta ! emon-me, peoc'h a vo ?..  
» Tri glaourennek euz ho saart-c'hui  
» A deui d'ober 'lezen deomp-ni ?..  
» Plou 'r mestr ama, sac'h ar bier ? »  
Ha me digeri 'r prenezier,  
An dourn kleiz var ho c'holierou,  
An dourn deou var founz ho bragou :

C'haoup, plaouf !  
C'haoup, plaouf !  
C'haoup, plaouf !

Strinket ho zri er meaz 'z an ti  
Hag eat da blanva var ho fri !  
Han ?.. (Ardou).  
Fifi !

Rinset 'n ti ha rised 'r blasen  
Ha paot Yan mestr var an dachen !  
Han ? (Ardou, c'hoarzin a ra en  
eur c'hina).

Ja me lavar deoc'h, me eo mestr an dud  
Haga oar kasar c'hillok hag ar yer d'ho glud.  
Han !

Goulennit digant 'n archerien !  
Taze potred ! gant ho sabren ! (Ho, ho, ho !)  
... N'euz ket pell oan paket gantho  
O tout d'ar gear euz ar friko  
E kar bian fountoun Jakez  
Eb goulou nag allumettez.

Ah ! — ha me disken var an hent braz  
Ha sellet outho fas a fas :  
Tri oant, ho zri krog em-chupen  
O c'houlen, mar plij, e lavarfen  
Ha plou oan ha plou n'oan ket.

